

# HOSTALERI ANN TRI GLEVE

WAR DON : *Ar ger Is*, pe eun all bennag.

Evid-hoc'h, hep-ken, Bretoned,  
Ma c'henvroiz meurbed karet,  
Em euz zavet eur ganaouten,  
Evit ho menli, ho kelen.

Nan, na war douar na war vor,  
Nan birviken potr ann Arvor,  
Nan biken na gavo he bar,  
Nan ! me hag ann holl hen lavar.

Vel-d-hoc'h, Broiz, n'euz ket a dud ;  
C'hoaz hen laran : mes, ho ! burzud !  
Dirak dour na tan na dec'het,  
Ha gant evach ez oc'h trec'het !

Eur Misioner, n'euz ket pell,  
En eur gear vraz a Vreiz-Izel,  
A dioraz eur brezegen,  
Hag a gomzaz skler evel-hen :

En ho kear, em euz, ma breudeur,  
Guelet eun dra n'euz ket nemeur :  
'Us d'eun or, tri gleve skouret,  
Hag 'us d'ezhe, eun aour skrivet :

*Hostaleri ann tri gleve!!!*  
Evid-on pebez merk neve !  
C'houi, da vihana, diskoel piz  
Pez 'zo 'n ho ti en gwerz, hostiz.

Ha ! Setu eun hostiz leal :  
He genvreudeur, gret kemend all :  
Neuze na vezo den paket,  
Nemet troet 've he spered.

Ia, en hostaleri pac'h-et,  
Dindan tri gleve tremenet :  
Ar c'henta a goll ann ine,  
Ann daou all, brud vad ha danve.

En he vue, ar c'henta mad,  
En deuz eun den, eo ar vrud vad :  
Mes direiz evach 'ra he vez :  
Hen diskoel na vo ket diez.

Greomp, eme Doue, ann den,  
Ha greomp-han war hon skeuden :  
War ann treo krouet e reno ;  
Ont-han peb-unan a zento.

Delc'hit 'ta : savet hoc'h huel,  
A dost ken huel hag eun el !  
Er renk-ze mar na chomit ket,  
E kouefet izel, don meurbet.

Ar skeuden-ze ken lugernuz !  
(Hen laret na pegen mezuz !)  
Nag a wech, c'houi, dre ho tech fall,  
Meoier 'c'heuz troket gant eun all.

Ann trok-ze 'zo meurbet dispar :  
Hag, a dra wir, me hen lavar :  
Bre nan war ho tal e welan,  
Ia, skeuden al loen ar lousan !

Ar spered ! Kaeran sklerijen !  
Roct d'ann den 'vid hen kelen :  
Meoier, c'houi 'c'heuz tevaleet,  
Hag en direiz evach beuet.

Dinerz, sammet kalz re bonner,  
Hag a blad kouet, en berr amzer,  
E kerzet, treid, daouarn fankek,  
War grabanou 'vel eun tousek.

C'hoaz ar gomz gant Doue roet,  
Ar paour-kez en deuz-hi kollet !  
Breman na ra nemet grognal  
Diroc'hal evel eul loen all.

Ar veoenti, mamm ann direiz,  
Enn-hi 'zo pep fall en he leiz :  
Hep mar, gant-hi nep 'zo trec'het,  
En berr amzer 'rai pep torfed.

Euz holl gourc'hemennou Doue  
Roet d'imp 'vit hon c'has d'ann ee,  
A dra wir, nan na zo hini  
Na dor bemdez ar veoenti.

Ia, beb beure, 'n eur difuna,  
Setu aman he zonzj kenta :  
Hirie c'hoaz, meur, meur a lommik :  
Setu he bedenn birvidik.

Gand ar meoier hano Doue  
'Zo mastaret liez bemde,  
Gand al leio ann euzuzan  
Pere 'ra d'ar galon semplan.

Ar sul, de ann otro Doue,  
De ar bedenn, de an ine,  
Ar meoier en deuz al lezenn  
D'hen rei d'ann evach penn-da-benn.

Gwellan kelou ! 'me ar meoier,  
Hirie 'zo dior eur goel kaer !  
N'euz netra evel eur pardon ;  
En-berr 'mo c'hoaz gwalc'h ma c'halon.

Enor ha kurunen ann tad  
'Zo he vugale reizet mad,  
Hag a-berz bugale diroll,  
Ann tad 'neuz mez dirag ann holl.

Mes, mar g-eo ann tad eur meoier  
Penoz biken rai he zever ?  
Kaer difenn, kaer prezek 'nevo,  
He vab evel-t-han a evo.

Ar meoier, 'vit galloud evan  
A dalc'ho ar gaou ar goasan :  
'Vel po c'hoant : ia, nan, a laro :  
Ken ez : du, gwenn a doueo.

He holl vado en 'deuz evet,  
Hep bean torret he zec'hed :  
Mad he nessa hen a skrapo,  
Ia, dre holl, el lec'h hen hallo.

Petra larer ? Pebez torfed !  
Dec'h, eun den a zo bet lac'het !  
Ha piou 'ta eo bet ar muntret ?  
Piou ? den all nemet ar meoier !

Direiz evach a lemm bue  
Digant ar c'horf hag ann ine :  
Ia, nag a veoier reuzeudik  
A zo bet kavet maro mik.

Mervel meo-dall, tristan doare !  
'Vid ar meoier hag he ine :  
N'en deuz na speret na kalon  
'Vit goulenn ouz Doue pardon.

Doue lar er skridou zantel,  
Kerkouls ha dre ann Ebestel,  
Eur gomz biken n'he zislaro :  
Enn he di, meoier na lojo.

Ha Satan ive a lavar :  
(D'eur galon vad pebez glac'har !  
Kanv 'zo enn ee, goel enn ifern !)  
Delc'het, m'ho lojo, everien.

O ma Broiz a Vreiz-Izel,  
Ha klevet ret-hu ar gentel ?  
Prenet 'ta skiant ha furnez ;  
Leret a galon, enn eur voez :

Ia, meoenti, mamm ann direiz,  
Enn-oud a zo pep fall' nhe leiz ;  
Ouz-id me a stourmo a-gren,  
Ia, a-vreman ha da viken.

Ken gwir, mar telec'het stard d'ho  
Ken gwir, larout e hellin-me :  
C'houi 'zo, Broiz, eur bobl hep par,  
Ha dreist ann holl, war ann douar